



**DIWAR-BENN**  
Kantadoù a realizatourien-ezed a zo deuet da skrivañ o film evit ar sinema war Aod ar Mojennoù - un endro vat evit ar faltazi. E c'hwezek vloaz eo deuet Le Groupe Ouest, staliet e Plouneour-Brignogan, da vezañ ul lec'h n'heller ket ober heptañ war ar sevel danevelloù en Europa.

An diskouezadeg en diavaez **SINEMA-RED** a lak war-wel tudennoù film sinema ijinet ha fesonet gant o oberourien-ezed war aodoù norzh Penn-ar-Bed. Eus traezhenn An askol glas betek an atant kozh renevezet hag implijet gant Groupe Ouest hiziv an deiz, e voc'h pedet gant bommoù senarioioù ha tudennoù da splujañ en istorioù bet ijinet war Aod ar Mojennoù.

Lañset 'oa bet ar raktres CINAMBULE e 2019 gant Ti-kêr Plouneour-Brignogan, a-gevred gant Le Groupe Ouest, gant souten Tourisme Côte des Légendes, hag ar c'hevredigezhioù Village d'Auteurs, Beva er Vro ha Randonnée et Patrimoine.

Petra 'vez graet gant **LE GROUPE OUEST** ?

1. Stummañ oberourien-ezed da skrivañ o senario(ioù) e atalieroù kaset da benn gant senaristed a-vicher.
2. Broudañ ar c'hask war ar c'hontañ hag ar c'hrouñ istorioù faltazi.
3. Kevelañ ar bed ekonomikel ar rannvro gant diorren ar sinema e Breizh.

**MENEGOÙ**

SENOGRAFIEZH & FOTOIOÙ  
Brigitte Bouillot  
  
MOULLAÑ & STALIAÑ  
Ouestelio, Brest  
& Toute la pose, Fred Bossard  
  
KENURZHIAÑ  
Mariannick Le Menn,  
Ti-Kêr Plouneour-Brignogan  
& Chloé Ansquer, Le Groupe Ouest  
  
FOTOIOÙ AR FILMOÙ  
DIVINES © Easy Tiger / France 2 Cinéma  
ADAMA © Naïa Productions  
CLOSE © Kris Dewitte





# ADAMA 10 20

**FILM SEVENET GANT** Simon Rouby, kenskrivet gant Julien Litti  
**PRODUET GANT** Naïa Productions

Julien, ar senarist & Simon, ar sevenner a oa deuet da skrivañ ADAMA e Groupe Ouest e 2009. Amañ eo ganet tudenn ar gouelanig, adkavet a-hed an istor.

**SELEKSION** Annecy 2015 | Festival etrevroadel film animasion

# CHIEN DE LA CASSE 15 19

**FILM SEVENET GANT** Jean-Baptiste Durand  
**PRODUET GANT** Insolence Productions

Deuet e oa Jean-Baptiste da ijinañ e film hir kentañ e Groupe Ouest e 2017. Tro 'n eus bet da zont en-dro dibaoe, evel stummer/kuzulier evit al Lab. E 2023 e vo tu da zizoleiñ e film war ar skrammoù bras.

# CLOSE 7

**ER SALIOÙ D'AR 1<sup>er</sup> A VIZ DU 2022**

**FILM SEVENET GANT** Lukas Dhont, kenskrivet gant Angelo Tijssens  
**PRODUET GANT** Menuet, Diaphana Films, Topkapi Films, Versus Productions

Goude brud vras e film hir kentañ, GIRL, Kamera Aour e Cannes, e oa deuet Lukas e Groupe Ouest e 2020 da labourat war e eil film. Bloavezh ar c'henfinañ e oa. Ret 'oa bet 'n em adaptiñ, gant prantadoù labour war al lec'h, e Plouneour-Brignogan, lod all en linenn. War a seblant n'eo ket bet touellet ar realizatour a Veljik gant an doareoù ober-se...

**PRIZ** Cannes 2022 | Priz pennañ

# DIVINES 22

**FILM SEVENET GANT** Houda Benyamina, kenskrivet gant Romain Compingt  
**PRODUET GANT** Easy Tiger Films

A-hed ar bloavezh 2013, o doa labourer Houda & Romain war o senario e Plouneour-Brignogan. Hep reiñ da c'houzout fin an istor, e Soulougan eo bet ijinet senenn ziwezhañ ar film. Deuet e oant en-dro da Groupe Ouest e 2017 evit skrivañ o eil film hir.

**PRIZIOÙ** Cannes 2016 | Kamera Aour, Tri César e 2017

# LES BIGORNEAUX 3

**FILM SEVENET GANT** Alice Vial  
**PRODUET GANT** Les Films du Cygne

Deuet e oa Alice e Groupe Ouest e 2011 evit skrivañ LES INNOCENTES. Awenet eo bet he film berr gant ar mare bevet ganti amañ, hag en un doare naturel eo deuet en-dro da Gafe du Port evit treiñ LES BIGORNEAUX.

**PRIZ** César 2018 | Gwellañ film berr

# LES INNOCENTES 18

**FILM SEVENET GANT** Anne Fontaine,  
senario orin skrivet gant Sabrina B. Karine & Alice Vial  
**PRODUET GANT** Mandarin Cinéma

An div senaristez yaouank, Sabrina & Alice, leun a energiezh a oa deuet e Groupe Ouest e 2011 evit labourat war senario o film, 'n eus graet berzh bras er salioù sinema : gwelet eo bet gant ouzhpenn un milion a dud er Frañs !

**SELEKSION** Sundance 2016

# LES SORCIÈRES D'AKELARRE 16

**FILM SEVENET GANT** Pablo Agüero, kenskrivet gant Katell Guillou  
**PRODUET GANT** Tita Productions

Pablo, ar sevenner, ha Katell, ar genskriverez, a oa bet ambrouget war ar skrivañ e Groupe Ouest e 2012 ha 2013. Troet e Vro-Vask, ar film a vo da welet war ar skramm bras en hañv 2021 !

**PRIZIOÙ** 5 Goya e 2021 (César Bro-Spagn)

# L'HOMME QUI PEINT DES GOUTTES D'EAU 12

**FILM SEVENET GANT** Oan Kim & Brigitte Bouillot  
**PRODUET GANT** Paraiso Productions & Miru Pictures

Fotograforez ha senograforez Groupe Ouest eo Brigitte. Deuet e oa asambles gant Oan e Melioneg (Ty Films) e 2015 evit skrivañ o zeul-film. Istor tad Oan a vez kontet ganto, ul livour a Gorea 'n deus treset takennoù dour e vuhez-pad...

**PRIZIOÙ** Krakow 2021 | Priz ar seveniñ  
Seoul 2021 | Priz ar filmoberourien o tont war wel

# LOUISE EN HIVER 2 17

**FILM SEVENET GANT** Jean-François Laguionie  
**PRODUET GANT** JPL Films

Soutenet eo bet gant ar stal produiñ JPL Films staliet e Roazhon gant ar **BREIZH FILM FUND**, ar font debarzhadur krouet gant Groupe Ouest, evit produksion ar film bevaat-se, savet da 80% e Breizh (kentañ c'hoarvezet !).

**PRIZ** Ottawa 2016 | Priz pennañ

# MAMI WATA 9 13

**FILM SEVENET GANT** C.J. "Fiery" Obasi  
**PRODUET GANT** Fiery Film Company

Degemeret e oa bet C.J. Obasi e program etrevroadel Groupe Ouest e 2019 a-drugarez d'ur c'henlabour gant ar Ouaga Fim Lab. Evel-se eo n'eus dizoloet paotr Nigeria traezhennoù ar Vro Bagan. E 2023 e vo gwelet e film er sinemaioù.

# MIGNONNES 5 14

**FILM SEVENET GANT** Maimouna Doucouré  
**PRODUET GANT** Bien ou Bien Productions

Aet e oa gant Maimouna César 2017 ar Gwellañ film berr evit MAMAN(S). Deuet e oa Blouneour-Brignogan e 2016 evit labourat war he film hir kentañ, enoret e Sundance hag er Berlinale.

**PRIZIOÙ** Sundance 2020 | Priz ar seveniñ  
Berlin 2020 | Priz ar juri  
César 2021 | Gwellañ danvez aktourez

**SKIGNET**  
d'ar Yaou 21 a viz  
Gouere, 8e30 noz  
Sal Kastell Mor,  
Brignogan

# NOVA LITUANIA 4

**FILM SEVENET GANT** Karolis Kaupinis  
**PRODUET GANT** M-Films

Deuet e oa Karolis da Blouneour-Brignogan e 2017, da gemer perzh e program etrevroadel LIM | Less is More, krouet gant Groupe Ouest. Gwelet eo bet NOVA LITUANIA e salioù sinema Lituania e 2020.

**SELEKSION** Oscars 2021 | Kannad Lituania

# SOUS LE CIEL D'ALICE 8

**FILM SEVENET GANT** Chloé Mazlo, kenskrivet gant Yacine Badday  
**PRODUET GANT** Moby Dick Films

Deuet e oa Chloé & Yacine da Blouneour-Brignogan e 2016 da labourat war senario o film-hir kentañ, goude ar berzh 'n oa bet ar sevenerez gant LES PETITS CAILLOUX (César 2015 Gwellañ film bevaat).

**SELEKSION** Cannes 2020 | Semaine de la critique

# TEMPS MORT 6

**FILM SEVENET GANT** Ève Duchemin  
**PRODUET GANT** Kwassa Films & Les Films de l'Autre Cougar

Gallez deuet da vezañ Belgiadez, boemet gant an istorioù distro er vuhez eus tud bet e dalc'h ar justis : deuet e oa Ève e Groupe Ouest ur wech kentañ e 2017, evit ar program Boost Camp, a roe un taol-lañs d'ar filmoù sevenet gant maouezed. Ha deuet e oa en-dro ar bloavezh war-lerc'h, dalc'het evit "Selektadenn ar bloaz".

# UNE HISTOIRE D'AMOUR ET DE DÉSIR 1

**FILM SEVENET GANT** Leyla Bouzid  
**PRODUET GANT** Blue Monday Productions

Goude he film hir kentañ, leun a vuhez hag a startijenn, À PEINE J'OUVRE LES YEUX, e oa deuet Leyla da Groupe Ouest e 2016, evit labourat war skritur he eil film hir. Ur film hag a varko ar speredoù !

**SELEKSION** Cannes 2021 | Semaine de la Critique, film klozañ

# WOLF 21

**FILM SEVENET GANT** Nathalie Biancheri  
**PRODUET GANT** Feline Films Production & Lava Films

Dre zegouezh he doa gouezet Nathalie, plac'h a Italia o vevñ e Bro-Iwerzhon, e oa eus ar galv da raktresoù program etrevroadel Groupe Ouest... un nebeut devezhioù a-raok ma vefe klozet ! Kaset he doa deroù he raktres film hir memes tra, ha banko : dibabet e oa bet gant Groupe Ouest e 2017. Ha pevar bloaz war-lerc'h e teu 'maez ar film e sinemaioù Stadoù-Unanet, 'barzh pell er bed a bezh, gant aktourien mil-vrudet : George MacKay ha Lily-Rose Depp.

**SELEKSION** Toronto 2021

# YALDA, LA NUIT DU PARDON 11

**FILM SEVENET GANT** Massoud Bakhshi  
**PRODUET GANT** JBA Production

Berzh n'oa graet e film hir kentañ, UNE FAMILLE RESPECTABLE, seleksionet e Cannes. Deuet e oa Massoud da Groupe Ouest e 2015 evit skrivañ e eil film hir. Resevet en deus ar film souten ar **BREIZH FILM FUND**.

**PRIZ** Sundance 2020 | Priz pennañ

